

REBECHOU

Métro. $\text{♩} = 108.$

Kanet e miz Here 1909 gant A.-M. MÉVE
(Huelgoat).

H. G.



La - ret am euz great d'eoc'h di - ja : Pez a



zis - plij d'in en-noc'h ar muia, Ka - ret an e - bat hag



e - va re. Tra la - la - la - la, la - la - la - la - la -



la. Ka - ret an e - bat hag



e - va re, — Chom di - ve - zat en ho kue - le. —

I

Laret am euz great d'eoc'h dija ?
Pez a zisplij d'in enoc'h ar muia,
Karet an ebat hag eva re.
Tra la la la la, la la la la la la la.
Karet an ebat hag eva re,
Chom divezad en ho kuele.

II

Me am moa guele en deiz all
Ha dimezellad ha re all,
Hag em euz tout o dilezet,
Tra la la la la, la la la la la la la,
Hag em euz tout o dilezet,
Evit donet d'ho terempred.

III

Me garfe ve an teodou mud
Ha na zrougprezegfe muñ an dud,
Hag e lezfant an dud yaouank
Tra la la la la, la la la la la la la,
Hag e lezfant an dud yaouank
En honestis d'en em barlant.

IV

Etre an env hag an douar
Euz kalz a hirvoud ha glac'har ;
Mar deuz unan, me am euz va lod :
Tra la la la la, la la la la la la la.
Mar deuz unan, me am euz va lod ;
D'ho re garet me zo bet sod.